



CHANSON NEVEZ

COMPOSET VAR SUJET

Merc'hed ar Lassou pe Merc'hed ar Rubanou

Eus ar Baros ar Sizun



Var an toniou ar zeziro.

Tostaït eta tud youanc nag o clefet cana,
Eur chanson zo composit a nevez eur bloma,
Zo gret da merc'het ar lassou pe merc'het ar rubannou
N'ouzon penauz o henvet abalamour do ardou.

Tad, mad a speret santel roït din me sclêrijen
Evit mar gallin condui gent ma dorn va fluen,
'Vit mar c'hallin expliqua der a nevez guizion,
Abaoue eun neubeut amzer zo digoez et er vro.

Mes va studi a zo ijel a va speret a so ber,
Esom an deus sicour digant Pobl ar c'hartier,
'Vit rei d'in sclerijen da allout expliquat
Pe guement a chenchamant a zo er baros-man.

Lavaret tud ancien petra zeu do codellou
Abaoue ma zeo et o merc'het en mesk ar rubannou,
Lavaret mar plich petra c'heus gounezet,
Pe autramant da viana peira o c'heus collet.

'Vit n'ellan ket credi o pefe gouñidegez,
Rag er baros a... en cressk ar baourentez,
A goelet reas familiou zo dija revinet
Non pas sevel bugale mes goude vin savet.

A ben en den laquet en mesk ar rubannou
Er renker cavet arc'hant ebars eur goudellou
A gostreguet arc'hant a renker da gavet :
Red eo c'hoas bea guisket kaer a benn bea guelet.

C'hoarvezut a ra gante vel ar soudardedou
Po deveus eur revu vras et em lakeont en o fou
E bien ar re-man a zo eur memeus tra,
Pa vezont var diou renk deus eur revu ar vrasa.

Ageno eun dra benag diouzouc'h da lavaret,
Ne vo ket hir an amzer a dro zur vo brudet,
Ag en ellit kredi e c'hei ar brud var voassa,
Pa zeo guir teod an den neo ket 'vit henno.

Ebars en parros... e zeus kals a c'hiziou
A ne dint ket anavezet en kals ar baraziou,
Sellit pis eus ar merc'het e velot var o douarn,
Eur maneguou ar c'haera boëten o discouarn.

Evit er baros ma c'haller mui hinoui,
'Vit an nep a gompren mad ebars en merc'het mari
Bremaïc pa zeuyo an han hag an eol da doma
Ar rema e devezo parizol da ziseolia.

Gant eur rubanic scanv o tennec eun tol rod,
Non pas evit o breuviez mes vit plijout d'ar pot,
Ne c'hell d'en compren ken eu beut consideri,
Pa guement a c'hoaset o deus ar remed da zemezi.

Mes c'hoarvezout a ra gante en guis d'ar plac'h figus,
Goude m'o deus refusset teuer ive d'o refus,
Gant o oll mouchouerou bras e frisa ar boultren,
An tintamnyou brodet prest da vont divar o fenn.

Chaden vont en o c'herc'hen gant eur boutou lastiq,
Cleyer deus o zavancher ze a zo magnifiq,
A zin-dan o bouteier breman a veguigourou,
A zin-dan o dillet kaer marteze ve truilhou.

Caer o deus ar merc'hejou digas guichou nevez,
Ar baourentes za do enll nim get evit ampech,
Ar rema a zo tromplus da veur a estranjour,
Ganto habijou faro a gant o bejou aour.

Lezomp o guiskamanchou avomp var guement-se
No devezus nemet heuil pis gourc'hmennou Doue,
An Aviel a lavar selaouet mar queret,
An nep en em ijelah a vezo uellet.

A gan nep en em huella a vezo izellet,
Dre-ze me a gret erfad ar rema vo discaet,
Oll maint klasq sevel er basen huella,
Oc'hessa gouzout piou vezo enoret ar muia.

A digas a reont guichou a zo exquis meurbet,
Eur viltans eur gasoni zeo breman o goelet,
Ebars er prosessionou brema ve disjolen,
A goelet an tudou coz a zo disto o fen.

Ag a zivisk o zocou d'euill ar prosessionou
Merc'het ar rubonnoù eur c'hautrol a ziguor parizolliou
Selaouit me o ped hag o clefet brema,
Quement se man eus amzer me za da expliqua

Ar penn quenta en ilis zo bepred d'ar goazet
Kouls ama cle beza eur mes erves man eus clêvet,
Mes eur baros a . . . merc'het ar rubannou,
En em laqacaer eur penn arog evit ober begou.

'Vit en em zi' chiza vel mo devez c'hoant,
Talc'hont ar goazet a adren evit o erramant,
Merc'het ar rubannou me o ped mar be o madeles,
Grit brema refleçion mar bere do polontes.

Neo quet an aotrou Person a gomz brema ouzoc'h
Eur speret dister a zen a za da expliqua d'eoc'h
Quement a zell eus an Dansou averso oll c'halon
Pe evit lavaret gouelloc'h a roan donezon.

Dan Diaoul a de bompord de oll kontantamant,
Fouilli reont gant goad Jesus dispen o badiant,
En em dennit var o quis pa neus ket a moyen,
Da c'honit induljansou ag euill on Dansirien.

En quement assemble merc'het ar rubanou,
Ve ato fre arog e clasq un abegou,
Troug presegu an danserien quercouls ag ar real.
Goude beza enor anter-re c'hoant deze damzal.

Treuzi reont a c'hangnenou dont da astin o begui,
Cazi eul leo deus ar guer n'en em jeynont quet c'honi
Dont da blada da vood al leuriou velar yer
Celaouit ta me o ped brema merc'het fier.

Nep o coeffe dirag ar prosbital, gant eun quen fier,
A lavarje vijac tu prest da sevel eun er,
Gant o teodou in o quiniou zo ve pa ve scornet,
A ne fod quet d'oc'h mui cozeal eus ar botret.

A var sujet quement-se ezoc'h fier evel se
Evel pa defe tout peb a mills scoet leve,
Arça eta mignonnet n'ellan quet continui
Rag eun tamic ezeo chomet, goal va studi.

Ma vijen bet studiet evel eun autrou Person
Me a mije rimet c'hoas ma mije bet raison,
Me a gret an ostisien ebars en bourg....
Ma continunen drama a reyo o fortun.

Abaoue ma zeo deut ar ureuviez d'ar merc'het,
Vez efet cals a gafe muic'h c'hoas a goniec,
Gouscoude deus difen abeurs ar sœurezet,
Da nompas monet mui da frequanti potret.

Po devo c'hoant da efa mont an eil gant eben
Mes an draze vit merc'net zo eun amitie yen
Goelloc'h en cavont demeus er botredou,
Vit ma zeo mont eur vanden dan ostaleuriou.

Se ne get enorabl goelet banden merc'het
O vont dan ostaleuri defa cafe a conyec,
Agreaploc'h en cavont pa ve paet evito
Rogan daru muyo anezo vo scanv o godellou.

Comz a reer demeus Lambool, Sant-Egonec a Pleyber
Da braill merc'het. . . ., neus get er Finistère,
Gant o zoedou quen tano o monechou ero guennec,
En c'houzont quen brao stasquignat ar guellec.

An darn mui anezo avoalac'h o ve dezo,
Gouzrit petra lavaront a chench langach ar vro
Ne fell quet din en em avanç pa non quet re savant,
An dar muia anezo ne vezint quet contant.

A pa n'am beus get a c'hoant d'ober tor ouz nicun,
Quen nebeut ne garen quet miret oute o fortun,
Grac dezo da veza dra heurus bepret,
Couls an amzer da zonet vel an ini passeet.

Mes en pini benag et deus diou santimant
Ar plac'h se ne deo quet evit beza contant
C'hoant dezi da vont d'ar gouent da roul et yaouanquis
A cetu aze guichou a zo merbet exquis.

Celaouit ta me o ped merc'het ar rubannou.
Eun eur dont da finissa c'hoas eur guir pe zaou,
Ma pije d'alc'het eur c'las isel evel ma
Den ebet nan dije bet netra da lavaret.

Goella oc'heus da ober e zeo cherch a c'his
Heuil gourc'hennennou Doue ivez re an Illiz,
Ag evfot recompanset eun devez gant Doue,
Evit besa curunet vid an eternite.

FIN

(Propriété de l'Imprimeur.)

